

KREDO « NICÉE - KONSTANTINOPE »

Me 'gréd en eun Doue hepkén,
An Tad oll-c'halloudeg, krouer an neñv hag an douar,
Kement a weler ha kement na weler ket.



Diskan 1 :

Me 'gréd e Doue an Tad, Krouer an neñv hag an douar.

Hag en eun Aotrou hepkén, Jezuz-Krist, mab unganet da Zoue ;
Euz an Tad eo ganet araog an oll gantvejou :

Doue euz Doue, sklêrijenn euz sklêrijenn, Doue gwirion euz Doue gwirion ;
Ganet ha n'eo ket greet, kennatur gand an Tad, ha drezañ eo bet greet pép tra.



Diskan 2 :

Me 'gréd e Jezuz Krist, gwir Doue ha gwir dén.

Evidom-ni an dud, hag evid or silvidigez, eo bet diskennet euz an neñv ;
Ha korv e-neus kemeret, dre nerz ar Spered Santel, euz ar Werhez Vari,
Ha dén eo deuet da veza.

Evidom ive staget ouz ar groaz, e-neus gouzañvet dindan Pons Pilat,
Hag er béz eo bet lakeet.

D'an trede deiz eo savet a varo da veo, hervez ar Skritur Zakr.

Pignet d'an neñv, ema azezet en tu dehou d'an Tad.

Hag adarre e teuio gand gloar, da varn ar re veo hag ar re varo,
Ha ne vo fin ebéd d'e rouantelez.



Diskan 3 :

Me 'gréd e Jezuz Krist, or Zalver hag on Doue.

Me 'gred er Spered Santel, a zo Doue hag a ro buez, a zeu euz an Tad hag euz ar Mab ;
Par d'an Tad ha d'ar Mab, eo adoret hag enoret, ha komzet e-neus dre ar Brofeted.



Diskan 4 :

Me 'gréd er Spered Santel, a ro nerz ha sklêrijenn d'an Iliz.

Me 'gred en Iliz a zo unan, santel, katolik hag abostoleg.
Anzav a ran ez-eus eur vadeziant hepken, evid pardon ar pehejou.

Ha gortoz a ran adsao ar re varo da veo,
Ha buez ar béd da zond. Amen !



Diskan 5 :

Me 'gréd en Iliz Santel, gortoz a ran ar vuez peurbaduz.



1.Me 'gréd e	Dou - e	an Tad,	Krouer an neñv	hag	an	dou - ar.
2.Me 'gréd	e	Je - zuz	Krist,	Gwir Dou	- e	ha gwir dén.
3.Me 'gréd	e	Je - zuz -	Krist,	Or Zalver	hag	on Dou - e.
4.Me 'gréd er	Spe - red	San - tel,	A ro nerz ha sklêri -	jenn	d'an	I - liz.
5.Me 'gréd en	I - liz	San - tel,	Gortoz a ran ar vu -	ez	peur -	ba - duz.

Texte du Missel Romain

R1 : Je crois en Dieu le Père, Créateur du ciel et de la terre.

R2 : Je crois en Jésus-Christ, vrai Dieu et vrai Homme.

R3 : Je crois en Jésus-Christ, notre Sauveur et notre Dieu.

R4 : Je crois au Saint-Esprit, qui donne force et lumière à l'Eglise.

R5 : Je crois à la Sainte Eglise, J'attends la vie éternelle.